


773



HISTOR ADMIRABL

EUS A VUEZ

SANTEZ HELENA

Var ton YAN GUERIN.

C. G. R. M.

Brema e fell din discleria
Ar vuez Santez Helena
Bezit attentif d'e c'hlevet,
Ho calon sur a vo tocchet.

Clêvet a refot e beez
Carguet eus a dristidiguez,
Hac ar martir e deveus bet,
Hac a so ganti c'hoarvezet.

Me lavaro d'éc'h pen-da-ben
E voa hi caëra femelen
A guement a vije cavet,
Gant ar bed oll voa enoret.

Beza voa' vrassa qualite,
Pa voa hi merc'h da eur Roue;
Rac merc'h voa d'ar Roue Anton,
E Constantinopl voa e dron.

Pa voa Pab e Rom, sant Clement,
Ennes a voa eus e c'herent,
E voe bars er bed-ma ganet
Er blaves pëvar c'hant ha dec.

Goude an Incarnation
A Jesus, hon Roue guëion,
Er guër eus a Constantinopl,
Hac estimet bras gant ar bobl.

Pa voe en oad a bemzec vloas,
He mam diganti a varyas,
Ma fellas d'e zad e c'havet
Evit ma vije e bried.

Mont a eure da gaout ar Pab,
Hac en esper cavet e c'hrat,
Evit caout a gonsantamant
Da zimezi d'e verc'h yaouanq.

Ar Pab neuze pa er c'hlevas,
A respont gant eun horror bras,
Peléc'h m'ar c'hristen var ar bed
A guemerfe e verc'h da bried?

Gant an Ilis eo difennet,
Ha gant Doue eo ordrenet,
Na vezo james eureujet
Eun tad d'e verc'h james nepret.

E ve dimeet eur verc'h d'e zad,
Ennes zo eur c'hrim execrapl;
Eur c'hrim a enep ar lezen
Siouas, etouez ar gristenien.

P'e devoe clêvet Helena
Ec'h arrôje sur quement-mâ
Var ar môr en em embarqas,
Hac e Flandres en em rentas.

Eno pa voe hi arruet,
En eun eclus en em rentet,
Pa voe tost da eun abati,
E commanças son ar c'blec'hi.

Neuze an oll leanezet
A voe qerqent bras estonet
O clêvet ar c'hleyer o son,
Hac int mont oll en orêson.

Hac int mont ha sellet neuze
Pion a voa êru er c'hontre,
Ma remerqjont eur femelen
A zeue d'ho c'habout pen-da-ben.

Mont a rejont e procession,
Gant respet ha devotion,
Evit monet d'e rancontri,
Gant eur joa vras d'e saludi.

Ha pa velas hi aneze,
E voe estonet bras ive,
Hac oc'h o guelel a vanden
O tont d'e rancontr evellen.

Neuze recevjont anezi,
Ha conduit d'an abati;
Rac guelet a ront oll certen
E care an Autrou souverén.

Mes na chommas get pell gante,
E chenchias tinnat a gontre
Dirac ar roue Catebron,
Eun den cruel ha dirêzon.

Mont a eure var bord ar mor
Evit sovetei e enor,
Hac e pedas merdaïdi,
Mar plich ganeoc'h va imbarqi.

Un dra derrubl a erruas
Pa voant e creiz ar môr glas,
Rac an dud oll a voa lazet
Gant ar c'horserrien arraget.

Exceptet Santez Helena,
A voa eur femelen ar gaëra;
O sonjal cavet e guerc'hdet,
E voa hi ganto rezervet.

En orêson en em laqas,
Da Jesus en em recommandas :
M'ho ped, va Jesus, va Rone,
Conservit va virginite.

Pa voa achuet e seden
D'hor Zalver Jesus evellen
Un tan eus an Eê a goesas,
Al lestr hac an dud a losqas.

Hi voe preservet gouscoude
Gant ur planqen, dre c'hrac Doue,
Ec'h arruas e rivier Sign,
E qicheunie bord eur Jardin.

Ar rivier' ye bete Londres,
Hac eno e voa eur verjes,
Hac ur feunteun gaer a gavas,
En e c'hichen e tisquizas.

— 3 —

Ar roue Herri e guelas,
Bars en eun dristidiguez vras,
Azeet etal ar feunteun,
Ha ne voa den en e c'hichen.

Tostat a ràs neuze outi,
Hac e c'houlennas diganti :
Livirit din presantamant
A belec'h oc'h merc'hiq yaouanq.

Me zo eus a Constantinopl,
A guerent pinvidic ha nobl,
Hac a zo ama achappet
A dre daouarn ar barbare.

Ah ! va c'halon a fazi din,
Rac naon a meus ne allan mui ;
Pell bras zo a'emeus debret tam
Ha va c'halon em c'hariz a rann.

Ar roue Herri p'e c'hlévas,
D'e Aumonier a gommandas
Monet pront da guerc'hat dezi
Peadra vit e soulaji.

Neuze en e c'hassas gantâ
Ebars en e dy da loja,
Hac o tont d'e recommandi
Evel unan a dud an ty.

Goude-se e voent demezet,
Souden e voc grêt an eured,
Hac ar fest a badas gante
Betec an nombr a ugent de.

Daou vlaves antier ez int bet
En o flijadur assuret,
Qen en em gavas dougerez ;
Neuze e devoe goal vuez.

Digant e mam-gaer, ar Zantez,
E devoe calz a baourentez ;
Herves ma rapport an histoar,
E devoa calz eus a c'blac'har.

Ar roue Herri a yas timat
Da gaout an tad santel ar Pab,
Evel m'en doa recommandet
D'ar gombat ouz ar Sarazinet.

Lezel a eure en secret
Tri verq er gaer eus e gachet :
Rei ras unan da Helena,
Un all da Vari Clocestra.

An drede neuze a roas
D'ar C'hont a voa e vignon bras,
Da bini e recommandas
E briet gant affection vras.

Glac'har vras a voe er pales,
O lavaret adieu assambles,
Hac epad eiz vloa varnuguent
N'en em velint sur e nep hent.

Helena e devoa ganet
Daou vuguel a voa caer meurbet ;
He mam-gaer a roas da gredi
Penos e devoa bet daou guy.

Ar roue Herri pa glevas,
A voe certen estonet bras,
O clevet e devoa ganet
Daou guy evelse e briet.

Neuze e voe hi condaonet
Da gaout e brec'h deo troc'het,
Hac amaret e bugale
Unan dezi a bep coste.

Ambarquet voe var ar môr bras,
Ebars e Breiz e tisquennas.
Al lestr en devoa e digasset
Da Londres a zo retornet.

Cri vije'r galon na voelje,
Oc'h e gnelet nep a vije,
O rei da zen d'e bugale,
Hac hi prest da vervel digante.

Da gousquet pa en em laqas,
Daou leon eus ar c'hoat azenas,
Hac a gassas an daou vuguel,
Qement-mâ certen voa cruel!

Un Ermit a voa neuze'r c'hoat,
Ha diouz ar c'hri a zeuas timat;
Hac a gavas an daou vuguel
Etre grifou daou leon cruel.

Unan anê Bric a hanvas,
Eguile Martin a c'halvas;
O daou e voant gantan maguel
Epad c'hozec vloas assuret.

Ebars epad an amzer-mâ
E voe e Naonet Helena,
Hac un hostises a gavas,
Truez outi a guemeras.

Chom a eure da zervicha,
Ebars an ty voa'n disterra;
Dispriset voa gant pepini:
Laqet voa da dorchalistri.

Ober a rê gant dilijanç,
Hep na rebel na repugnanç,
Qement a ordrenet dezi,
En o rê oll hep contraignî.

Guelit amâ greg eur Roue
Carguet demeus a baourante,
Rentet qen humbl ha qen izel
Dirag ar bed universel.

Sellit brema 'n humilite,
Hounez a blich bras da Zoue,
Rac an humbl a zo exaliel,
Hac ar superb zo discariet.

Ar roue Herri distro a Rom,
Ha ganta ar roue Anton,
A erruas en e bales
Ebars ar gær eus a Londres.

Allas! eno pa eruas,
Ar c'hont Clocester a gavas,
Ha goulenn neuze diganta
Peleac'h voa eat Helena.

Nao messenger voa digasset
Dirac ar Roue da lavaret
O doa digasset pep a liser
D'ar c'hont Clocester a dra scler.

Mes eun all a zeuas goude,
A lavaras ar virione,
Penos e voa bet trahisset
Gant ar Rouanez cöz assuret.

Ar rouanez cöz zo condaonet
Da veza en beo losqet,
Abalamour ma e devoa
Laqet trec'hi brec'h Helena.

Me lavaro deoc'h ar recit
An daou vuguel hac an Ermit,
Ha penos voe an disparti
Ebars er c'hoat gant calz a gri.

— 5 —

An ermit var bord ar rivier
A yeas gant an daoe vuguel;
Aman, emezan, o qivis,
Ganen d'am zy ho tigassis.

An daou vuguel a respontas
D'an Ermit outi pa gomzas;
N'en dé get c'houi-ta, Ermit-mat,
Eo a zo a dra sur hon tad?

An Ermit neuse a lavaras
Deze gant tristediguez vras,
Allas! m'ho cavas amañ lezet
Etre bleizi ha loenet.

Ra gant truez m'ho tigassas
Ho taou ganen d'am ermitach,
Hac emeus ivez ho maguet,
Nac'h elevet hac instruet.

An daou vuguel a lavare
An eil d'eguil aneze;
Pa n'en dé an hermit hon tad,
Deomp-ni brema da glâsq hor mad.

An ermit a voe trist meurbet,
Pa o c'hlêvas o lavaret
E zâjent, alas! da glâsq o mat,
Pa na voa get en voa o zad.

Pa voant o tiscours evelse,
Erruout merdaïdi ene,
Brema ez eus c'hoêzec vloa
E legezomp ama Helena.

Gant angen vras digonsolet
D'e daou vuguel e doa collet,
N'e devoa brec'h nemet unan
a zicour daou vuguel bian.

Neuze e lavaras Martin,
Bric, va breur, deomp bete r fin,
Elec'h ma plijo gant Doue hor c'hass,
Ma cavimp hor mam eur vech c'hoas.

Merdaïdi, ni ho suppli,
Plijet gueneoc'h hon ambarqi,
Ma zaimp en hano Doue
Da glâsq hor bro hac hor c'hontre.

Ar Merdaïdi a respontas
D'an daou vuguel pa o c'hlêvas,
Deut en hon lestr hac ambarquet,
Ni ho laqai en douar assuret.

En Allemagn ec'h arrijont,
Hac arc'hant dezo a rejont;
Ouspen e rejont da leina
D'an daou vuguel gant calz a joa.

En Baviere pa voant arru,
E zeont o daou a ru da ru,
Ma o guelas ar Rouanes
Ebars er ru eus e fales.

Ma gommandas d'e messenger
Mont da guerc'hat an daou vuguel,
Rac qer caër oant evel an de,
Clorianda o admire.

Digasset oant neuze dirazi,
Roet o voe deze da zibri;
Neuze evel tud affamet
Ne squizent o tebri o boed.

Re hir ven ma contsen antier
Ar brezel voa er bro Bavier,
Mes beza voant victorius
An daou vuguel, dre c'hraç Jesus.

77 3 B

0000

— 6 —

Martin a voa eun den vaillant,
Hac ebars er gombat sanglant
Laha a reas calz a Sarazinnet,
Ha calz eus an Turqianet.

An Itron Varia Boloigne
O sicouras sur an deiz-se,
Hag evit caout ar victoar
Dre c'hraç Jesus var an douar.

Da Dour e tejont ac'hanc,
Eur gaer a so en Tourene,
Sant Martin a voa aumonier
Da rêi soulach d'ar beorien qer.

O mam ivez a erruas
En Tour gant eur baourante vras,
Pa voa Martin o tistribui
An aluzen da bep hini.

Goulen aeure diouti,
Pa deuas da zellet outi,
Pe a lec'h oc'h-hu deut amâ?
C'houi n'en d'oc'h qet eus ar vro-mâ.

Commanç a ras neuze e galon
Da zonet d'e biqat qen don,
Neuze e teuas sonch dezâ
Ebars en e vam Helena.

Diaguent en devoa clêvet,
Evel ma hon eus rapportet,
E voe troc'het eur vrec'h dezi,
Hac en dont da zonjal enui.

Neuze en em anavejont;
Gant joa vras en em saludjont;
Autrou Jesus, eme Helena,
Va bugale guès a velân.

Ne zeziren qet qent meryel,
Nemet guelet va daou vuguel;
Autrou Jesus, Roue an Trôn
Homâ zo consalation,
Da eur vam e devoa collet,
He daou buguel e deus cavet.

Adieu, emezi, va bugale,
Mont a ran breman en han' Done,
Ho pet ac'hanon sonch a memoar,
Va bugale guer, var an douar.

M'em bezo sonch ac'hanoc'h ive
Pa vin e rouantelez an ãe,
Evit ma vezimp oll assambles
Er Barados gant an æles.

FIN.

